

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ Radio Kreiz Breizh

KUSTUM

Kustum

Un anv, un anv-gwan pe un anv-kadarn e c'hell bezañ hag a zo deuet deus al latin, *consuetudo*

Ur c'hustum pe ur gustum

« Kustum Breizh », lezennoù na oant ket skrivet met a veze graet deuse

« N'anaveze ket kustumoù ar vro »,

Reizh = kustum

« Reizh on d'ober se », kustum on d'ober se

Kustumiñ pe kustumañ

E-barzh kanaouenn An daou vreur pe Ar verjelenn : « Ma n'oc'h ket bet kustumet, kustumo a refet »

« Ar c'hustum », ar pezh a veze paeet evit kaout ur plas war ar marc'had

« Sevel ar c'hustum », mont da serriñ arc'hant plasoù ar marc'had

« Paotr ar c'hustum » pe « Plac'h ar c'hustum », an den a veze en karg da sevel ar c'hustum

« Kustumiñ a ran mont da gousket abred »

« En em gustumiñ »

Kustumañs

« Ar gustumañs 'n eus tapet »

Kustumañsoù

Digustum

Digustumañ

« Digustumet eo (bet) »

« Ne gustuman ket »

« Evel kiz ha kustum »

« Deus ar c'hiz »

Da vont pelloc'h

Kit da selaou ar ganaouenn 'N om gustumiñ deus an deñvalijenn gant Krismenn

COPFINANÇÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne



Avec le Fonds européens
de développement régional



Ar legadeg
a d d d